

(34, suite)

Droug-ober
A enep buerz ar Roue,
ar 16 a vis Ebrel 1846.

(35)

Breizis ! gür gristenien, savomp hor c'halonou
Leun a anaoudequez varzu Mestr an êvou ;
Trugarecaomp-en, laomp hon esperanz,
Er C'hrouer souveren, Protectour eus ar Franç :
Dre viracl ar brassa, brec'h galloudec Doue
En deus c'hoas savetët e vuez d'ar Roue !...
Eur c'hef eus an ifern a zo en em gavet,
Possedet gant Satan, e galon counnaret :
Ar C'homt eo e hano d'an den milliquet-se,
En preiz d'an drouc-speret, den garo, didrue,
Quedal rê ar moment ma teuje da dremen
Ar Roue, e famill, a voa ët da bourmen.
Gergent ma voent tostët, oll en o charaban,
An den eriz a leuscas varnezo daou dol tãn
Ar plom en meur a blaç zo er char antreet,
Mes ar famill royal n'e deveus drouc abet.
Ar bour, c'hoas entanet, saillet dre nerr an tenn,
Zo, gant ar rouanez, cavet var he barlen ;
Spouronet erit gür, e crëm vit ar Roue ;
Mes n'en deveus nep drouc, a drugare Doue .
— « N'ho fet nep aoun, Itron, emezãn, tranquil bras :
» Doue zo evidomp, evel er quelit c'hoas . »
O Providans divin ! ouz eun torfet qer cris,
C'houi deu da savetat Mab Hena an Ihs !

(36)

Ar muntrer counnaret a glasq gemer an tãc'h ;
Redec a rêr varnãn.... Trappet eo dre e vrec'h .
Newze, leun a arnach, e clasq en em difen ;
Hae eo gant calz a boan ec'h eljot dont a benn
D'en discar, d'en laqat en eur stat n'elle qet,
En despet d'e furor, ober mui drouc abet.
An deiz varlerc'h e voe dastumet er prison,

114

Da zepord prononci e gondanation .
 Güelit eta, Breizis, penos eo ar Roue
 Dre wir viracl atao diwoallet gant Doue !
 Niveri rêr brêmân eiz eus e vuntreien
 O deus clasqet larza Roue ar Francisien :
 Bergeron, Fieschi, Alibaud, Genisset,
 Darmès, Hebert, Meunier, ar C'homt eo an eizvet ;
 Mes atao dorn Doue a deu d'en preservi
 Eus counnar an dud fall, criminal hac impi .
 Trugarecaomp oll hirio ar Brovidanç,
 A evessa atao var rouantelez Franç ;
 Bezomp anaoudec mad a vadelez Doue,
 Ha criomp a galon : Ra vero ar Roue !

(Vol. VII, p. 34-36.)

Non signé . Mais doit être
 de Lédan .